


Ar maneg



A PETITS PETONS

LA MOUFLE

Florence Desnouveaux
Cécile Hudrisier

Didier Jeunesse

Setu istor ur maneg ruz kouezhet e-barzh an erc'h
war an hent.



Hag ul logodenn o tont. Gwelet a raar maneg ruz :

- Oh ! Un ti tomm ! Tud a zo e-barzh ?

Den ebet o respont.

Hag al logodenn da vont e-barzh ar maneg.

- Mmmmm ... Pegen tomm eo din bremañ



Oh ! Petra eo ?

Al logodenn a glev trouz ... Hag unan bennak o prezek :

- Oh ! Un ti tomm ! Tud a zo e-barzh ?

- Ya amañ emañ ! Al logodenn on ! Piv out ?

a respont al logodenn.

- Ar c'had on. Yen eo din. Gallout a ran dont ganit ?



ch'krii ch'krii ch'krii

- Evel just ! a respont al logodenn.

Ha setu ar c'had o vont e-barzh ar maneg.

Mmmmm... Pegen tomm eo deomp bremañ !

a lavar ar c'had hag al logodenn asambles.

Bremañ int daou e-barzh ar maneg :

Ar c'had hag al lagodenn.



Oh ! Petra eo ? Al logodenn hag ar c'had a glev trouz ...

Hag unan bennak o prezek :

- Oh ! Un ti tomm ! Tud a zo e-barzh ?
- Ya, amañ emaomp, ar c'had hag al logodenn. Piv out ?
- Al louarn on. Yen eo din. Gallout a ran dont ganeoc'h ?



- Evel just ! a respont al logodenn.

Ha setu al louarn o vont e-barzh ar maneg.

Mmmmm... Pegen tomm eo deomp bremañ !

a lavar al louarn ar c'had hag al logodenn asambles.

Bremañ int tri e-barzh ar maneg :

Al louarn, ar c'had hag al logodenn.



Oh ! Petra eo ? Al louarn, ar c'had hag al logodenn a glev
trouez ...

Hag unan bennak o prezek :

- Oh ! Un ti tomm ! Tud a zo e-barzh ?

- Ya, amañ emamp, al louarn ar c'had hag al logodenn. Piv
out ?

- Ar pemoc'h- gouez on. Yen eo din. Gallout a ran dont
ganeoc'h ?



ch'krij ch'krij ch'krij

- Mmmmm... Mad eo met ne chom ket plas ...

a respont al logodenn.

Ha setu ar pemoc'h-gouez o vont e-barzh ar maneg.

Oh ! La, la ! Re domm eo deomp ! a lavar ar pemoc'h-gouez,

al louarn, ar c'had hag al logodenn asambles.

Bremañ int pevar e-barzh ar maneg : ar pemoc'h-gouez,

al louarn, ar c'had hag al logodenn.



Oh ! Petra eo ? Ar pemoc'h-gouez, al louarn, ar c'had hag
al logodenn a glev trouz ...

Hag unan bennak o prezek :

- Oh ! Un ti tomm ! Tud a zo e-barzh ?

- Ya, amañ emamp, al louarn ar c'had hag al logodenn.

Piv out ?



- An arzh tev on. Yen eo din.

Gallout a ran dont ganeoc'h ?

- N'eus ket plas ken ! A respont al logodenn.

- Gwir eo ? Klasket'vo ...



Lakaat a ra an arzh tev e benn e-barzh ar maneg : crrr

Lakaat a ra an arzh tev e bav e-barzh ar maneg : crrr

Lakaat a ra an arzh tev e bav all e-barzh ar maneg : crrr

Lakaat a ra an arzh tev e gof bras e-barzh ar maneg : crrr

Lakaat a ra an arzh tev e gorf a-bezh e-barzh ar maneg :crrr

Lakaat a ra an arzh tev e lost e-barzh ar maneg : crrr



Distrujet ar maneg !

Hag ar pemoc'h-gouezh, al louarn, ar c'had hag al logodenn
a lamm e-barzh an erc'h hag red kuit.

Hag an arzh tev a chom sabaduet :

Petra a zo bet ?



Setu

Echet an istor, evel-se !

